

Diskan

Kenavo deoc'h, gwir vretoned,
Bleuniañ a ra al levenez!
E peb kalon, ouzh ho kweled,
Enor deoc'h-c'hwi, ha trugare(z)!

" hag e-barzh ar fin:"

D'AR VRETONEG, GLOAR HAG
ENOR DA VIRVIKEN!

1.-Kanet hon-eus a galon vad,
En enor d'ar vro, da Zoue,
Mall eo skoulmañ kent 'n-em guitaad,
Gand ur zonenn hor harante(z)!

2.-Sonet hon-eus, breudeur laret,
'Vid hadañ joa, pellaad glac'har!
Ha deskiñ d'hor breudeur laret
Ez eus Breiziz war an douar!

3.-Ez eus er bed-man ur vro gaer,
Tud vad ha kaloneg enni,
Hag e-neus taolet he splannder,
War hent an enor hep fazi!

Refrain

Au revoir, à vous, vrais Bretons,
La joie s'épanouit!
Dans chaque cœur, en vous voyant.
Honneur à vous et merci!!

" et en final:"

AUX BRETONS! GLOIRE ET
HONNEUR A TOUT JAMAIS!

1.-Nous avons chanté de bon cœur,
En l'honneur du pays, de Dieu,
Il est temps de renouer, avant de se quitter,
Avec un chant, notre amitié!

2.-Nous avons chanté, frères aimés,
Pour semer la joie, éloigner la tristesse!
Et pour apprendre à nos frères à dire
Qu'il y a des Bretons sur terre!

3.-Qu'il y a dans ce monde un beau pays,
Dans lequel il y a des hommes bons et
courageux,
(Et) qui a projeté sa splendeur,
Sur le chemin de l'honneur, sans faillir!